

## Plourazel

Diskan

Itron Vari Trezien, Mamm vad ar Arvoriz  
Ha n'eo ket douz d'ho kalon gwelet en oc'h iliz .  
Gwelet e-harz ho skeuden e-leiz a gristenien  
Hol ez int ho pugale, selaouit o' fedenn

Pa vez digor ar bleuniou, kaer eo al letounenn  
Pa vez founus an eost , laouen eo an dachenn  
Kaeroc'h ha pinvidikoc'h 'ez eo c'hoaz eun iliz  
Leun a gristenienñ fidel a car pedi gant feiz

Pedit , pedit gant fizians , breudeur ha c'hoarezed  
Rak war ar,mean eunan petra welit skivet ?  
Da vad , da vad e teui. Komz dous mar deus unan  
Da vad , da vad e teui ? Diou wech e lavaran

Diou wech e meus lavaret hag hel livirin c'hoaz  
Rag ar Werc'hez zo fidel , bepred eo leun a c'hraz  
He grasou puilh a goezo e iliz Trezizn  
War hor c'horf war hon ene n'hon deus nemet goulenn

Martolod paour en dantjer e kreiz an tarziou gwen  
Livirit:Me osalud , gwerc'hez dous Trezien  
Ne viot ket sur ar c'henta a zo bet digaset  
Betek an treaz gant eun dorn n'helle den da welet

Klanvourien , war ho kwele , o krena an derzienn  
Pedit ivez a galon Patronez Trezien  
Ma ne ro deoc'h ar yec'het, e roio koulskoude  
Eun dra c'hoaz presiusoc'h, ar peoc'h vit hoch ene

Daoust hag eun den daic'het en e holl izili  
Da vad ha n'eo ket deuet el leac'h man o pedi  
Ar chapel kos zo kozet hag houman zo nevez  
ar pezh a jencho morse eo galloud ar Werc'hez



